



# CANTIC SPIRITUEL

EN ENOR

## D'AN IFRON VARIA A PORZOU,

Pehini a ra cals a Viraclou er Castel-Nevez.

Var ton : O Tad, o Mab, o Sper et Glan.

Me a garre Guere'hes Vari,  
Galloud cresqui ho meuleudy,  
Hag e pep calon angravy.  
An hano JESUS ha MARI.

Pet d'en a so er Barados  
Joayus, eürus deiz ha nos,  
Pere p'nd e sicour MARI,  
A vizie en tan o lesqui.

Pet den siouas a so daounet,  
Hac a al-se hesa salvet,  
Mar carzent pedy a galon  
MARI hon Mam hac hon Itron.

Gret mat eo assur bisita  
Chapelou n'Itron VARIA,  
Gant guir Feiz ha devotion  
Evit gallout caoüet pardon.

MARI ra cals a Viraclou  
Er Chapel hanvet ar Porzou,  
Tostic d'ar Castel-Neve,  
Pa ze permission Doue.

Evit ma vezo inspiret  
Cals emeus a Pelerinet,  
Da visita ar Chapel-se,  
E rapportin darn a neze.

Eun den dign d'a vezout credet  
En danger da veza beuzet,  
Er mor tostic da Venodet,  
A so bet ganti recouret.

O veza prest da gonfonti  
Em voüestlas a galon dezi,  
O prometti mont d'ar Porzou  
O gouzout-se re Miraclou.

He pried clan hag affliget,  
He gant midicin dilezet,  
D'ar Porzou en em voüestlas.  
Ha souden yec'het e cavas.

Beza ezoa diou vreg vrases  
Ebars er Guer a Vontroules,  
Pere o vesa poaniet bras,  
Da vont d'ar Porzou en em voüestlas.

Hag yves Euzen ar Cornec  
A Pares Guisgrif assuret  
Epad teir sizun ezeo bet  
Hep' gallout ober eur gamet.

En em goüestlas en deues gret  
D'ar Verc'hes Sacr ha biniguët,  
Hag en deues bet ar yec'het :  
Chetu Miraclou bras meurbet.

A Pares Edern ententet  
Yves Louïs al Louedec  
En devoa collet ar gueleit,  
Allas ! ne wele lom e bet.

D'ar Porzou er Castel-Neves  
En deus en em goüeslet yves,  
Hac en deus bet ar gueleit  
Digant ar Verc'hes viniguët.

A Pares ar C'hastel-Neves,  
Frances ar Ros ez eo hanvet,  
Eur croüadur yaoüanc meurbet,  
Biscoas n'en devoa bet querset,  
Er Porzou en deus bet remet.

C'hoas er gear a Castel-Neves  
Eur croüadur yaoüanc yves,  
En devoa collet ar querset,  
D'ar Porzou eoa douguët.

Goude beza bet er Chapel,  
Ez eo disouget d'ar feunteun,  
Hac en deues bet ar querset  
Dirac an oll assistantet.

Francesa ar Bris, a Quarahes,  
En deues discleriet yves,  
Eur gar dezi a voa breinet,  
Percluses voa en em rentet.

En em recommandi e deus gret  
Da Vam hor Salver biniguët ,  
Hag e deus bet ar yer'het ,  
Meulomp hor Salver biniguët .

Eus ar guez a Castel-neves  
E voa eur voue'hisés yves ,  
Quen terrubl oa incommodet  
Ma devoa collet ar querset .

D'an Itron VARIA ar Porzou  
He deus offret e fedennou ,  
Ar feunteun yves bisitet ,  
Neuze souden oe soulaget .

Daou croüadur eus a Gourin ,  
Unan voa clan gant ar darsien ,  
Un all ne alle quet querset ,  
Er Porzou o deus bet remet .

Hac yves Ezen ar Boudet  
Eus a Pares Sant Hernin ,  
En devoa collet ar querset  
Meurbet e voa incommodet .

Ebars e Chapel ar Porzou  
En deues gret e pedennou ,  
Hac er feunteun en em goele'het ,  
Neuze en deus bet ar querset .

Quer buan e voent delivret ,  
Hag o veza bet dispoanniet ,  
Donet ña rezouët d'ar Porzou ,  
Da renta joaus ho vœvou .

Er Castel-Neves e crogas  
Ebars ar goal un tan bras ,  
An ty tosta a voa goëstlet  
D'ar Porzou eur plaç biniguët .

Incontinant e voue mouguët  
An tan , ha flammou diremet ;  
Chetu , pec'her bras , Miraclou  
A rer e Chapel ar Porzou .

Eun nosvez eun ozac'h a Las,  
Er Castel-neves a coëzas ,  
Divoar ar pont en eun dour bras ,  
Miracl eo pa ne veuzas ,

Crial a re : « Guere'hes VARI ,  
Ma recouret , me ho suppli , »  
En instant e voue preservet ,  
Hac emeus a rivier steiget .

Eur croüadur o voud coëzet .  
En eur punç , hag eno lezet ,  
A het tri deis so preservet  
Dre voyen MARI biniguët .

Eun all epad teir heur antier  
O veza beuzet en eur Ster ,  
Ato bet recouret salo ,  
Hag a dleze beza maro .

Piou eo na vel breman scler ,  
Ar miraclou bras ha caër  
A ra Ver'hes dre graç Doue  
Ar Porzou er Castel-neve .

It oll eta a vandennou  
D'ar Chapel devot ar Porzou ,  
Da implori gant guir fianç  
He sicour hac e assistanç .

Eur Capucin eus ar Pares  
En deves dre he vadeles ,  
Reot Relegou a pemp Sant ,  
Hac eus eur Santes a present .

Da cresqui an devotion  
En andret MARI hon Intron ;  
Rac ma zeo guir Advocades  
Evit an oll pec'herien quæs.

Er mis Eost er Sul diveza ,  
Emedi e Fardon brassa :  
Deuet oll gant devotion  
Da gounit ar remission.

Hon Autrou Person en deus bet ,  
Evit an oll Pelerinet  
Emeus a Rom eur jubile ,  
Pehiny a pado tri de.

Itron VARIA a Porzou  
Obtenit deomp ar graçou ,  
Da alloud em convertissa ,  
Ma hallimp guel ho servicha.

C'hoy so Intron a guelou mat ,  
Ho recommandit oll d'hon Tat ,  
Ha suppliet ho Mab JESUS ,  
D'or rentas da james eurus.

AMEN

